

Jean Michel Veillon hag ar fleütoù

Ur soner a-vicher er skolaj.

Deuet eo Jean Michel Veillon da Skolaj Diwan Bro-Dreger d'al Lun 17 a viz Mae evit komz deomp, hag e brezhoneg, eus e fleütoù, rak ur soner fleüt a-vicher eo, hag unan ampart.

Ne vez ket fentus ordinal beajiñ!

Ganet eo Jean Michel Veillon er C'hab Frehel e Breizh-Uhel. D'an oad a zek vloaz en deus desket dañsal, ha da unnek vloaz eo e krogas da seniñ bombard. El lise eo en em lakaas da zeskiñ brezhoneg o heuilh kentelioù, en tu-hont d'e gentelioù all, diouzh an abardaez pa veze aet ar re all d'ar gêr.

Pa 'z eo kroget da seniñ fleüt, ne sone ken nemet tonioù iwerzhonat, ha tamm-ha-tamm en deus desket tonioù a Vreizh.

Lâret en deus deomp ne veze ket bepred ur blijadur bezañ soner a-vicher, rak ret e vez bezañ dibrenn e varc'h da veajiñ kalz, hag ar beajoù na vezont ket plijus bepred. Met evel-se e vez desket traoù, anavezet tud nevez ha desket seniñ gant binvioù disheñvel.

Ouzhpenn se, e vezer pell a-raok gounit e damm bara rak er penn-kentañ e vezer ur pennad brav a-raok bezañ anavezet.

Fleütoù koad, pri...

En Europa, ec'h ouvezer e soner fleüt abaoe d'an nebeutañ 35 000 vloaz. Hiriv an deiz, ez



Ur fleüt Pan



eus pemp pe c'hwec'h familh fleütoù disheñvel. Ar fleüt a vez kavet ar muiañ anezhi ez eo ar fleüt eeun hag a zo graet gant houarn pe koad, ar fleüt a-dreuz, ar fleüt a-gorn, ar fleüt Pan hag a vez c'hoariet dreist-holl e Roumania, ar fleüt voul pe an okarina hag a zo graet gant pri, hag unan all c'hoazh hag a vez c'hwezhet aer enni dre ar fri.



E pep lec'h er bed e vez kavet fleütoù sonet gant pep pobl. Pep fleüt he deus hec'h istor, un dalvoudegezh disheñvel evit ar pezh a sell ouzh ar garantez, ar brezelioù, an doueed, ar vitologiezh pe ar relijion... Da skouer, en India e oa sakr ar fleüt peurvuiañ. Peotramant, pa veze tomm ur paotr bennak ouzh ur plac'h yaouank e veze ret dezhañ sevel un ton eviti ha mont da c'hoari anezhañ dirak e zousig koant. Ma veze plijet homañ gant e don, e veze a-du da zaremprediñ ar paotr.

Evit ar saverien deñved e oa ar fleüt un doare da gomz gant an doueed, met ivez un doare da gomz etreze, a venez da venez, rak pell e vezent an eil diouzh egile alies.

Diouzh ma vez ar fleütoù e vezont aes pe diaes da c'hoari. Se zo hervez o ment (hir, berr, moan, tev...), al lec'h ma'z int bet graet, an danvez a ya d'ober anezhe hag ar stumm. Tonioù disheñvel-tre a vez sonet gant pep fleüt.

Pa oa echu ar gentel e voe klozet an abadenn gant dañsoù. Sonet en deus Jean-Michel gant Pierre-Louis ha plijet-tre e oa an holl gant se, sonerien koulz ha skolajidi.

Savet gant Felicia Pochart



3de klas Skolaj Diwan Bro-Dreger

